



Treset an hent heuliet gant pirc'hirined an Dro Breizh.



Savit linenn an amzer.



Adroit e sant da bep eskopti.

Eskopti	Kêr	Sant	Anavezet evit
Kernev	Kemper	Kaourintin	Pareañ an dud nammet (dall, bouzar, kamm pe satanazet)...
Leon	Kastell-Paol	Paol Aorelian	Mirout ouzh ar gwalennoù. Bezañ bet trec'h war un aerouant.
Treger	Landreger	Tudual	Mougañ an tan ha pareañ ar re vouzar, ar re zall, ar re vac'hagnet.
Sant-Brieg	Sant-Brieg	Brieg	Pareañ an dud ha doñvaat ar bleizi.
Sant-Maloù	Sant-Maloù	Maloù	Mirout ouzh ar gwalennoù. Bezañ lidet un oferenn war gein ur valum.
Dol	Dol	Samzun	Lakaat ar vugale da vale ha da gaout nerzh. Ur goulm 'oa deuet war e skoaz e-pad ma oa o lâret an oferenn.
Gwened	Gwened	Padern	Degas ar glav. Kaout un amzer dereat evit ar gounidoù...

Mont pelloc'h ganti:

An Dro Breizh a-vremañ.

Pirc'hirinajoù chomet bev c'hoazh: Tro Vinic'hi Lokorn pe hini Landelo...

Levrioù diazez:

Le Roy, Chaloni, *Tro-breiz, pèlerinage des sept saints de Bretagne*, 1925.

Le Roy, Florian, *Tro-breiz, pèlerinage aux sept saints bretons*, Librairie celtique, 1950.

Mendès, Charles, *Au sujet du tro-Breiz*, Éditions du Moulin Vieux, 1991.

Feiz ha Breiz, 1924, niv. 12.

WAR ROUDOÙ AN AMZER

TRO BREIZH



Teuliad
Niv.
01
Istor — Geografiezh
skolaj

Ha kas a ra pell e'hoazh an hent glas-mañ, ma contr?
Pa van yaouank, ma niz, e lavare ar re gozh e gase d'an neñveit. Red e oa hepken
heuliañ anezhañ betek penn, a-dreuz ar seizh eskopti.
Petra eo an istor-se? O farsal emae h?
Ket. Gwir eo. Siwazh n'eo nemet ar re gozh a anavez e'hoazh an traoù kozh....
Kevit ma niz, an hent-se, dall bremañ, a oa gwechall hini an dro-Breizh.»
Anatol ar Bras

Ar sant pellañ,
ar sant gwellañ.
O, sent ma bro
Ma diwallit.
Sent ar vro-mañ
N'anavezan ket.

● Petra 'oa?

Ur pirc'hirinaj war an «hent glas» evit mont da bediñ war relegoù ar Seizh Sant (ar Seizh Breur).

● Peur?

D'ar pevar amzer etre an deket hag ar seitekvet kantved ha, gant ul lusk bras, etre ar pevarzekvet hag ar c'hwezekvet kantved.

● Da beseurt mare?

'Tro Pask (penn-kentañ ar bloaz d'ar mare-se).

'Tro ar Pantekost.

'Tro Sant Mikael Gwengolo.

'Tro Nedeleg.

Padout a rae ur miz ha kregiñ a rae pemzektez a-raok ar gouel.

● Penaos?

War droad.

Da ober e-kerzh e vuhez, kuit da gaout an hent-se da ober goude ar marv, en ur ober neuze hirder un arched bep seizh bloaz hepken.

● Piv?

An holl dud: paour ha pinvidik.

Evel an Dug Yann V e 1409.

Hervez testennoù zo e vefe bet war-dro 30000 pirc'hirin ar bloaz er XIV^{vet} kantved.


● Hirder?

109 lev Breizh (1 lev a dalv evit 4800 m) da lavarout eo war-dro 520 km, gant devezhioù-bale 20 km pe war-dro.

Echu ar pardon
Kenavo d'ar sant.



Tresit an hent heuliet gant pirc'hirined an Dro Breizh.



Savit linenn an amzer: Merkit peur e oa bet berzh gant an Dro Breizh.



Adroit e sant da bep eskopti.

	Eskopti...	Respont :	Sant ...
	Dol	-----	Brieg
	Gwened	-----	Kaourintin
	Kastell-Paol	-----	Maloù
	Kemper	-----	Padern
	Landreger	-----	Paol Aorelian
	Sant-Brieg	-----	Samzun
	Sant-Maloù	-----	Tudual

Enklask

Klaskit krennlavarioù diwar-benn ar sent. Krediñ a rae an dud e c'helle ar sent-mañ pareañ pe gwareziñ an dud. Klaskit evit petra e vezent pedet hag aspedet.

